


# Gwerz Sant Men

War don ar werz-man, a ve kanet en eskopti Gwened hag  
a zo troet diouti ar c'homzou a roomp pelloc'h.


Andante




Kris - te - ni - on par rez Ké-



ven, Chileuet bu hé kaër Sant Meen, Bu-hé er  
rall.




zant e hues la - ket E mesk hou Patro med ka-



ret.

Diskan



Hou pu - ga - li - geu. o Sant



Meen, Trema zoh e saù ou fé - den, Aweit hé



gou-lennet g-t Doué Ie-hed er horv hag en i



né. Aweit hé gou-len-net get Doué Ie-hed er

rall.



horv hag en i - né.

Kristenien parouz Tremeven,  
Selaouet buhe kaer sant Men,  
Buhez ar zant hoc'h eu laket  
E-touez ho Patroned karet.

DISKAN

*Ho pugaligou, o sant Men,  
Davedoc'h a zav o feden ;  
'Vite goulennet gant Doue  
Yec'hed ar c'horf hag an ine.*

E Breiz-Veur eman bet ganet  
A ouen nobl hag uhel meurbet ;  
E dud oa, 'kreiz o oll danve,  
Gwir servijerien da Doue.

D'ar Werc'hez, kent ma oe ganet,  
O c'hrouadur o deuz goestlet ;  
Gant karante war e gavel  
Ar Werc'hez a dolaz eur zell.

N'o doe ken sonj ar gerent-se  
'Met d'en sevel evit Doue ;  
Ar gentan komz an deuz disket  
Oa hanv ar Zalver benniget.

Hen gwelet 'rer yaouankik flam,  
E zornik en hini e vam.  
O vonet laouen d'an iliz,  
Fur 'vel eun el 'pad an ofis.

Gant ar vesaerien war ar maez  
E plije d'han kanan 'n eur vouez  
Gwerzious kaer ha leun a furnez  
Savet da Zoue, d'ar Werc'hez.

Pa vesaent o denvedigou  
Strewet ouz krap ar meneiou,  
En-dro da Ven ind 'n em vode  
'Vit e glevet komz eus an Ne.

Nag evrusat eur vain, eun tad,  
O deuz bugale savet mat !  
Rak gante ind a gav eun de  
Frealzidigez, karante.

Ha c'hwi, bugale Tremeven,  
Mar vennet heuilh skwer-vad sant Men,  
Ha bean karet gant Jezus,  
Ouz ho tud c'hwi a vo sentus.

Karante Men 'vit e dud vad  
Ne re 'met kriski gant an oad ;  
Prestik ranko o dilezel  
P'eman Doue ouz e c'hervel.

P'eman Doue ouz e c'hervel  
Da zevel hon Bro Breiz-Izel :  
Hon zent o deuz, goude Doue,  
Savet hon Bro en amzer-ze.

En Gaël ober a reaz  
D'e venec'h santel eun ti braz ;  
En o mesk e oa 'vel enn tad  
Int e gemeraz da abad.

'Pad ma saver an abati  
Na oa ket dour 'vit ober pri ;  
E vaz en douar a blantaz  
Ha kenkent an dour a strinkaz.

Goude, d'ar feunteun vurzudus  
Ec'h é e-leiz a dud kredus,

'Vit bout gwellât dre eur beden  
Diouz an droug hanvet *Droug sant Men*.

Hen varvas 'vel m'en doa bevet  
Gant Doue, gant an dud karet ;  
O! na kaerat ar gurunen  
Bet roet en Ne da zant Men !

Kent pell, e Breiz e zo savet  
Ilizou d'ar zant binniget,  
Rak e c'halloud dirag Doue  
Zo brasoc'h 'vit 'pad e vue.

Aman e weler eur feunten  
'Lec'h c'ha tud feal da zant Men,  
Da c'houlen, dre nerz an dour-ze,  
Yec'hed ar c'horf hag an ene.